



Refrain.

D'an Aotrou Krist en Izelvez
 Honor ha gloar e Guinevez
 Honor ha gloar da virviken
 D'ar groaz guir banniel ar c'hristenn.

D'ar mare ma teuz ar feiz
 da skeñi var douar Breiz
 Hor bro abez oa dismantret
 Gant laercoun-vor, an Normaned

Fragan brezellour kalounek
 a zigoras eur stourmadek
 hag en Izelvez, hon tud koz
 a drec'has tud an hanter-noz

Gant pinvidigez an estren
 Ar vretoued a zao kerkent
 e kichenig eur feunteun c'hlas
 eur chapel hag eur gouent bras

D'an Aotrou Krist int dediñt
 Pee guir Jesus hen deus roet
 an trec'h var ar balaned kriz
 D'ar Vretoued ha d'an Iliz.

Urs Sant Beneat dizale
 gant ar venec'h e vugale
 Dre ners labour ha santelez
 A gas da bell brud Guinevez.

Siouaz tremen a ra pep tra.
 Kuezet var dour Loc-Maria
 Ar gurun a ziskar ive
 Nadoz tour bras an Izelvez.

Ar gouent vraz dem-dilezet
 gant an tan gwal a voe devet
 ar vein anezh 'o serviche
 da zevel tiez tro var dro

M'ar d'eo diskaret ar gouent
 e chom er chapel evelkent
 An Aotrou Krist an Izelvez
 O veilla var tud Guinevez

Ra zeui d'e gaout da bep mare
 E vignoued, ar vugale
 Ra zeui da stoui dirazan
 ad dud ankeniet, ar re glanv

Dalc'homp bepred d'e honori
 bezomp aketus d'e bedi
 Dreist-oll da c'houel ar groaz savet
 Ha da bardoun ar groas Kavet.